

Rolland Charlez (1862-1940) ; Euz Gwerliskin
Modernnaet eo bet an doare-skriva, ha reizet kemmaduriou ‘zo.
Pell a-walh ema an droidigez euz ar skrid orin.

Ar Bempoulezenn

(Troet diwar skrid Théodore Botrel)

O tilezel e waremmo’
Pa’h a ar Breizad war ar mor,
D’ar besketaerez en pell-bro,
En eur gimiadi deuz Arvor,
 Ar paotr-kêz a gan,
 Sioulig e-unan :
Me ‘gar Pempoull hag e dunenn¹,
E bardon kaer hag e dour koz²,
Ha dreist-oll ar Bempoulezenn,
A zo er vro deuz ma gortoz.

Pa’h eont kuit war o listri,
Ar beleg ‘lar de³ : « Mibien vraz,
Pedit Sant-Erwan-Heloury,
Or gwel deuz an neñv atao glaz. »
 Hag ar paotr a gan,
 Sioulig e-unan :
Na n’eo ket ken glaz ar goabrenn,
En despet da zant Erwan koz,
‘Vel lagad ar Bempoulezenn,
A zo er vro deuz ma gortoz ?

Renet gand e damm steredenn,
Ar Patron koz, dindan e zao (!)
‘Lar eo gwennoh e lienenn
Eged askell eun êlig brao !
 Hag ar paotr a gan,
 Sioulig e-unan :
En despet dit da lienenn
N’eo ket ken gwenn war da wern-fao⁴,
‘Vel m’eo koef ar Bempoulezenn,
A zo er vro deuz ma gortoz !

Ar pesketaer heb en em glemm
A stlap e linenn hag e grog,

¹ e dunenn : “tun“, a dalvez kement hag “erin“. Ar ger reiz a vefe “tornaod“. Sañset e teufe ar ger “tun“ euz ar galianeg “dun“, a vez kavet e meur a nao-leh er Farñs, hag a dalvez kement ha “run“. Marteze e vefe implihet “dunenn“ e Gwerliskin ?

² e dour koz : eun iliz bet distrujet, ne jom anezi nemed an tour, a vez greet anezi “An tour koz“

³ de : dezo.

⁴ da wern-faoz : ar wern a-dreñv.

'H a d'ober eur housk pa ziskenn
Deuz c'hwez an hili⁵ en em stok ;

Ma lavar 'n e gan,

Sioulig e-unan :

Kalz bravoh, me 'gred, e vijen,
Dindan ma liñseliou groz,
En-kichenn ar Bempoullezenn,
A zo er vro deuz ma gortoz !

Med aliez pa zivuno,
An avel greñv, ar mor treitour,
'Ve bet deuz e lestr ken garo
Ma'h a kalz outi gand an dour !

Hag ar paotr a gan,

Sioulig e-unan :

'Vel zo ezomm 'benn 'n em zivenn
Ouspenn eru paotr 'eneb ar Zaoz,
Me ray daou d'ar Bempoullezenn (!)
A zo er vro deuz ma gortoz !

Med allaz ! pa deuio e dro,
Galvet gan d eun taol-mor euzuz !
Ar pesketaer kêz a zento,
'N eur ruillenn er mor izlonkuz...

'Raog mervel 'ray c'hoaz

Eur wech sin ar groaz :

Poked a ray d'e vedalenn
O soñjel kaoud ar baradoz
Eun devez ar Bempoullezenn
A zo er vro deuz e hortoz !

(D'am henvreur ker Doric Botrel.
Gwerliskin, d'ar 14 a viz Gwengolo 1897.)

⁵ an hili : dour-hal.